

# Gerioù ar vuhez

**RKB**

▶▶ | Radio Kreiz Breizh

## PINVIDIK

### Pinvidik

Un anv-gwan an hini eo. Distaget e vez "pinvik"  
ba' Kreiz Breizh

« Ar pinvidig » a dalv un den pinvidik,  
evel « Ar paour », arouez ar re baour


« Sant Erwan etre ar paour hag ar pinvidig »,  
peogwir e oa Sant Erwan avokad ar re baour

[http://www.reseau-canope.fr/tes/skeudennaoueg/skeudennoù\\_krouet\\_gant\\_Malo\\_Ar\\_Menn](http://www.reseau-canope.fr/tes/skeudennaoueg/skeudennoù_krouet_gant_Malo_Ar_Menn)

Pinvidikaat, dont da vezañ pinvidik  
a vez distaget "pinvikaat" e Kreiz Breizh

« Pinvidik-brein » pe « Pinvidik-mor »,  
un den en deus ur bern arc'hant

« Ar re binvidik »



A-bep seurt  
pinvidigezhioù zo.  
Ouzhpenn un afer  
arc'hant eo :

« Ar peoc'h 'zo ur  
binvidigezh »


« Ar yezh a zo ur  
binvidigezh evit Breizh »

« Ur yezh pinvidik »,  
ur yezh puilh, gant ur  
bern gerioù chik

« Pinvidigezhioù ar vro »,  
glad ar vro

« Gwell eo furnezh evit pinvidigezh »

« N'on ket pinvidik, n'on ket paour  
met din-me ar frankiz a dalv aour »



### Da vont pelloc'h

« Ar paour pa binvidika  
gant an diaoul e ya »,

« Trouz arc'hant  
ha c'hwezh vat  
biskoazh n'o deus graet  
gwall gofad »,

Cofinancé par  
UNION EUROPÉENNE  
UNANIEZH EUROPA



L'Europe s'engage  
en Bretagne / Avec le Fonds européens  
de développement régional